

## Kantik an Tad Maner. (1)

---

Ton anavezet, pe ton : *Ma c'halon a zo fraillet.*

DISKAN :

*Allaz ! allaz ! Bretoned, maro an Tad Maner,  
Maro eo ho sklerijen, maro eo ho Tad ker :  
Maro eo tost da Gerahez, e presbital Plevin,  
Evel m'en doa lavaret, e kreiz douar Kaourintin.*

DISKAN ALL :

*Meulomp, meulomp, Bretoned, meulomp an Tad Maner,  
Meulomp mignon Mam Doue, ha mignon hon Zalver,  
Er vro-man gant karantez, en deuz kals labouret,  
Ganeomp-ni dre c'hras Doue he gorf a zo chomet.*

Da iliz skolach Kemper, he galon zo kasset,  
En iliz parrez Plevin he gorf zo interret ;  
En he yec'hed en devoa aliez lavaret :  
Elec'h ma kouez ar vezen e renk beza lezet.

Pa zeuje dre ar maro Jezuz-Krist d'hen gervel,  
Gant ar bopl paour en devoa bet deziret mervel.  
« Gantho am euz tremenet, emezhâ, ma bue,  
» Gantho goude ar maro, chom a garen ive. »

Tavit eta, pobl a Vreiz, n'en em c'hlac'harit ket ;  
Oc'h peden an Tad Maner en deuz Doue klevet ;  
En ho kreiz ez eo chomet, evit ho soulaji,  
En ho korf hag hoc'h ene, dre Jezuz ha Mari.

Koumanset mad en deveuz an eil hag egile,  
Aben nemeur e lennot skrivet en he vue,  
Da bet den klanv en deveuz e pep kanton guellet,  
Dreist ar re all, e Plevin, d'ar re ia d'hen gullet.

(1) Ar c'hantik-ma zo bet savet gant an Tad Visant Martin, a oue kompagnun an Tad mad en he vissionou, epad pevarzek pe bemzek vla. An Tad Martin a varvas e mission Plouisy, d'an 9 a viz Du 1686.

Kommisserien an Eskop e c'hallo lavaret  
Pet greg a boan vugale en devez dilivret ;  
Da biou en deuz ar c'herzed, ar c'hleo, ar guel rentet,  
Ar burzudou a rañ c'hoaz, hag ar re en deuz grêt.

Ginidic oa a Zant-Jorj, en Eskopti Roazon,  
Pedir leo diouz Foujerez, pedir diouz Pontorson,  
Hogen choazet gant Doue, an abostol fidel,  
Evit diski hent an Env d'an oll e Breiz-Izel.

Ne voa nemet trizek vloaz, o koumans he studi,  
Pa lavaras Dom Michel Nobletz dre brophesi :  
Maga rer din eur peskig (1) en Eskopti Roazon,  
A zeui souden da vro Breiz da ober mission.

Pa rene ar bempet klass er skolach a Gemper,  
E teuas Michel Nobletz da velet he vap ker,  
Hag e komzas euz Andre hag euz he vreur Simon,  
Pa ho galvas hon Zalver da ober mission !

En distro e lavaras da Zouarnenezis,  
Gant gras Doue c'hui velo c'hoaz mission e Breiz ;  
Choazet am euz an hini, dre c'hourc'hemen Doue,  
A dle ober mission er vro-man ma goude.

Ne lavaras ket dezhan neuze c'hoaz Dom Michel,  
Ez oa choazet gant Doue da ziski Breiz-Izel ;  
Mes Doue a zisklerias dezhan he volonte,  
Pa ze eun deiz d'ar chapel hanvet Ti-Mam-Doue.

Entre Kroaz-ar-Gardien ha maner Kermorvan,  
E roas eur sclerijen dezhan ar Speret Glan,  
Dre behini a velas euz Breiz ar c'harteriou ;  
Da bere oa red dezhan mont da glask eneou.

Pa antreas e chapel ar Verc'hez an Itron,  
En em offras oll dezhi a gorf hag a galon.  
« Prest ha pront oun, emezhan, da zikour ma Salver,  
» Da zistrei ar bec'herien zo koustet dezhan ker. »

(1) E Douarnenez e lavaras ar gomz-se, dirag pesketourien.

Ho pet koun, Guerc'hez santel, euz ho missioner.  
En ho ti, d'ar mission 'n em ro an Tad Maner,  
En ho ti, eo koumanset ; ganeoc'h e kendalc'ho,  
En ho ti, gant grass Doue, eun deiz e finisso.

Ebars ar ger a Vourjez pa oa abandonet,  
En eur c'hlenved diremet gant ar vedicined,  
Deiz Nedelek, kent reseo sakramant an Auter,  
En em voestlas evelhen e prezans he Zalver :

« Jezuz, Mari, sant Ervoan hag ælez Breiz-Izel,  
» Mar rent Doue din yec'hed, me iel bete mervel,  
» Da ober ar mission e mesk ar Vretonet,  
» Me her promet a dra zur, gant eur galon barfet. »

Doue a gomzas outhan en eur zakramanti,  
Hag a lavaras dezhan : Pare viot hep si ;  
Me a gontanto ive dezir braz ho kalon,  
Ha me ho kasso da Vreiz da ober mission.

En amzer-ze, eun nosvez, dre he gousk e sonje  
E touge var e gein eur paizant a Gerne ;  
Evel sant Fransez Xavier e sonjas e touge  
Eun Indian, kent monet e mission d'ar vro-se.

Kouraich eta, Kerneviz, eun deiz d'ar Baradoz,  
An Tad Maner o tougo evit biken repoz ;  
Ha kalz a Roazon, Guened, Sant-Briek, Leon, Dol,  
Hag a Dreger a viro ne daïnt ket da goll.

Me a gleo sant Kaourintin, dija oc'h o kervel,  
Tad Maner ha Tad Bernard, ho kompagnun fidel.  
« Deut var ma lerc'h, emezhan, m'ho krai pesketerien,  
» A galz a bec'herezed ha kalz a bec'herien. »

M'ho guel ho daou o nijal dreist ar mor pirillus,  
Da besketa ez eont eneou da Jezuz :  
Bet int dija e Brihat, Sizun hag enez Groaz,  
E Molenez hag Eussa, enez Tudi ha Baz.

Eun troad ho deuz var ar mor, eun all var an douar,  
A gamejou braz ez eont en noz evel al loar,  
Hag en deiz evel an heol, ha dre ho sklerijen,  
E chassëont euz a Vreiz ar goall denvlijen.

Euz an Tad Maner ez a ar brud e pep kanton,  
E pep lec'h hen goulenner da ober mission.  
An eskibien hen goulen, personet, beleien,  
Autronez, itronezet, tud ploue, bourc'hizien.

Piou a ouffe lavaret e pet lec'h ez eo bet,  
Ha pet pec'her e pep lec'h en devez distroet ?  
Essoc'h eo kont' ar stered, pa vez sklerra an noz  
Evit an dud en devez kasset d'ar Baradoz.

C'hui her goar, o ma Salver, c'hui oc'h eus sur kontet  
Pet den dre he zermoniou en deuz saveteet,  
Pet dre ar goffession a bec'herien mezet,  
Pet dre ar procession a bec'herien dallet.

Lammet eo an ignorans dre he gatekismou,  
Ar c'homzou louz ha lubric dre gan he gantikou ;  
Gret en deuz ober bemdeiz d'ar Verc'hez oregon,  
Desket en devez pidi Jezuz-Krist a galon.

C'hui eo, beleien santel, c'hui missionerien,  
Ar fourdilizen gaera eveus he gurunen ;  
Da Zoue dre he zouder, dre he brudans parfet,  
Dre he orezon santel en deuz ho kounezet.

Dreizoc'h eur bopl hep niver hen deus saveteet,  
Hag a rai gant gras Doue a'han da fin ar bed ;  
Houma oa he joa vrassa, pa edo er yec'hed,  
Hag an doussa levenez en diveza klenved.

N'hon euz ket kollet hon Tad, n'en em c'hlac'haromp ket ;  
Mar domp disparti a gorf, ne domp ket a sperèd ;  
Lezet en deus kent mervel ganeomp oll he galon,  
A rei deomp oll he unan he venediction.

Donet a ra d'hor zouten, pa zëomp d'ar c'hombat,  
Goulen a ra evidomp grassou digant hon Tad ;  
Diskennet eo aliez euz an Env da zikour  
Ar bec'herien treladet gant an droug enebour.

---